



**CANTIC**

**VAR BUEZ SANT ISIDOR,**

**PATRON AL LABOURERIEN.**

*Var an ton ancién.*

**D**rinDET santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulib,  
 Me ho ped da rei graçou d'ho servicher indign,  
 Da gomposi ur c'hantic en gloar hac en enor  
 Da Batron al Labourer, ar Zant bras Isidor.

C'hoant ha desir bras ameus, gant ar c'hraç a Zoue,  
 Da zislêry d'ar Vretonet an tenor e vue  
 Al lec'h ma voa bet ganet, e gontre hac e vro,  
 E oberiou excelant, ivez e vertuziou.

Mes, Majeste adorabl, Doue, Roue an Trôn,  
 Tranquilisit va speret, ha tomit va c'halon,  
 Ha roit din hoc'h asistanç ebars em antrepris,  
 N'ouffen qet bea goassa, ervez ma meus avis.

Honont ar guêr gaptal a Spagn, hanvet Madri;  
 E devoe en avantach guechal da brodui  
 Ebars en o fohourziou ur rosen precius;  
 An Autrou Sant Isidor, mignon bras da Jesus.

Bars en creiz ar baourentez ec'h antreas er bed,  
Ha demeus ar baourentez e ressentas bepret;  
E guerent a voa roturier, a vadæu dibourve;  
Mes leun oant a santelez hac a zoujanç Doue.

Represanti a rejont, gant peb rejouissanç,  
Ar rejeton admirabl en templ gant dilijanç,  
Ila var fons-badiziant e visqas ar zê venn,  
Pehini n'en deus souillet biscoas e nep moyen.

Isidor ê bet hanvet, balamour d'an enor  
A zougue ar Spagnolet d'eur zant all Isidor,  
Escop bet e Seville, pa voa var an douar,  
Hac erfin eus e vue recompanset er gloar.

E dad a voa sourcius, e vam a voa ive,  
Da instrui Isidor el lezen hac er fe :  
Carante hac union, exempl mad ha doctrin,  
Eo a rê an ornamant eus o bue divin.

Ah! pebes contantamant da un tad ha d'eur vam,  
Cavet digant un Doue ur buguel qen divlam!  
Qen douç, qen oboissant, qen pur ha qen parfet,  
Qen humbl, qer carantezus, qen docil, qen caret.

Pa deuas sqient dezàn, ec'h offras da Zoue  
Ar faculteou santel demeus e oll ene,  
E volonte, e sperot, hac ivez e vemoar,  
Hac e vuez en antier da bossedi ar gloar.

Ar sonjesonou frivol ne gavent qet a blas  
E speret Sant Isidor, dont a rê d'o bargas;  
E galon oa siellet, na elle mann antren  
A guement a oa control d'ar fe ha d'al lezen.

Ar sanson eus an natur oa gantàn reglet mad,  
Eus an enoriou monden ne rê qet a etat;  
En ur guir, goell oa gantàn mil ha mil guech mervel,  
Eguet dont da gometi james pec'het marvel.

Pa deuas gallout dezàn, hac én cresqet en oad,  
E tilezas e famill, e has da labourat;  
Evel ma oa ezomec eus a vadou ar bed,  
E renqas mont da gopra evit gounit e voued.

Evit gallout substanti ha beva e famill,  
En em laqas da vevel e ti un dijentil,  
Da di an autrou Vergas, eus ar guér a Vadri,  
Den a galite huel, e has da servichi.

Ebars er profression demeus a guir Gristen  
Oa fidel ha ponctuel da viret e lezen :  
Ebars er profression demeus al Labourer  
Oa fidel ha ponctuel da ober e zever.

Pell qent an de e save Isidor bep mintin,  
Ha dirac ar crucifi prosternet d'an daoulin,  
Gant ur barfetet ampar a gorf hac a galon  
E rê d'an Autrou Doue peden hac oréson.

Hoguen dre ur jalousi d'e vestr voe accuset  
A enep gnir ha réson gant e gamaradet  
Da veza lach, feneant, disourci, dibreder,  
Ha na rê bemde c'houlou nemet coll an amzer.

Toret é oll, emeze, o c'horf gant al labour;  
Ne brise qet Isidor donet tam d'o zicour,  
Nemet b a red-dired bemde d'an ilisou,  
Hac ober e hipocrit, laret chapeledou.

Ar mestr evel ma clêvas an accusation,  
A laras gant garantez : Isidor, va mignon,  
Me ne meus qet ho caget da laeres an amzer;  
Rac-se bezit fideloc'h ur vech all d'ho tever.

Isidor a respontas gant un drêm gracios :  
En despit d'an oll valiç eus an dud anvius,  
Me servicho da guenta Jesus, Mab da Vari;  
Ennàn ema va fisianç, va support, va appui.

Un deiz e c'has Isidor d'e labour divezat,  
E vestr hac e partia d'e visita timat :  
Eruet tost d'ar mezou, e velas daou ael guenn  
O cundui an arer bars an creiz an dachen.

E vestr a laras neuze, sêsisset gant eston :  
Faus ê, evel a velàn, an accusation;  
Me voar dre experianç ê faus an oll glê mou  
Zo grêt dîn a Isidor abeurs ar goal deodou.

Davantach c'hoas d'ar goude e vestr voe tourmantet  
Dre an nerz eus an domder er parc gant ar sec'het;  
Mes Isidor en douar e c'harzou a blantas,  
Hac eno, dre c'hraç Doue, ur feunteun a savas.

Unan eus a vugale e vestr qer a varvas,  
Gant ur c'hlévet violant, hac en resuscitas :  
Qer bras voa e garantez en andret ar beorien,  
Ma multipli ar bara da rei an aluzen.

Un de pa yê d'ar vêlin hac ur sac'hat ganta;  
Dre ur scoulat morfontus e lêzas da scuilla  
An anter eus e sac'hat da rei d'al lapousset,  
En un andret en devoa en erc'h disolocet.

An dud pere a voa gantàn a gommanç da c'hoarzin,  
Da ober goab anezàn ; mes Doue quent ar fin  
A recomanç Isidor, a bê e garante,  
Rac carguet voe e sac'had dezàn gant larguente.

Pa voe en oad avancet, vardro un trégont vla,  
E choasas evit pried Mari a Gabeza,  
Ur grouadurez parfet hac a gare Doue,  
Hac en deussàn servichet gant peb fidelite.

An ên a roas deze erfin ur c'hrouadur,  
Carguet a avantachou a gostez an natur ;  
Mes ar maro diremed, dre ordrenanç Doue,  
A greis ar fleur eus e oad en lamas dignante.

Goude deced o buguel, ar rest eus o bue  
E concløjont assambles miret ar chastete ;  
Ar yun hac ar binijen, ar peoc'h, an orêson,  
Voa nouritur o ene, plijadur o c'halon.

Goude beza cunduet pell-amzer assambles  
Ur vuez ireprochabl ha leun a zanteles,  
Pried santel Isidor a rentas he ene  
Etre daouarn ar Verc'hes, ar Zent hac an Æle.

Ebars en ompinion a Zantes e varvas,  
Doue en e fersonach a rê miracloù bras,  
Hac ar bez e p'hini voa e c'horf enterret,  
A voe gant ar bobl Christen a bep tu enoret.

Ouz an disposition, ar sêson, an amzer,  
Eus ar glo pe a sec'hor, en Spagn en e feder,  
Hac e touguer en ezom er Processionou  
Gant calz demeus a brofit bepret he religiou.

Allas ! cetu Isidor e-unan dileset,  
Cetu maro e vuguel ; ha maro e bried ;  
Cetu muntret e galon gant qeus ha gant anui ,  
Tristidiguez , huanad , glac'har ha melconi.

Elec'h dont da hirvoudal ha da scuilla daëlou ,  
Evel ma zê ar c'hustum bars e sort rancontrchou ,  
E souffr gant patientet e boan hac e anqen ,  
Hac o sellet an évou e parlant evellen.

An arret so positif , ur vech ê ret mervel ,  
Renta hor c'hont da Zoue , ar bed-màn dilezel.  
N'en dom qet deut assambles , na n'e dimp qet ive :  
An eil Christen a renqo liena eguile.

Mab uniq an Eternel da guenta a varvas  
Hep e veza meritet , guechal var al Lamgroas ;  
Biscoas aboe ar maro ne bardonas da zen ,  
Nac a dra sur ha certain na bardono biqen.

Hon amzer var an douar n'en dê mert un ure ,  
A boan voar deut , na ranqer partia adare :  
N'en deus netra permanant , qement so a dremen  
Ebars en eur bêr instant evel eur vogueden.

Me offr déc'h , o va Jesus ! va glac'har , va zourmant ,  
Bars er gloar hac en honor d'ho Passion sanglant :  
Cetu me brêma chomet , allas ! digompagnon ;  
Ennoc'h emàn va fizianç , va c'honsolation.

C'houi crouer d'an évou ha crouer d'an douar ,  
Infini en majeste , hac infini en gloar ;  
Mestr ha Roue absolu demeus ar firmamant ,  
Qement tra so en antier ouzoc'h apparchant.

Goude beza anduret bars epad e vue  
Calz a boan hac a fatiq, e plijas da Zoue  
Erfin dont d'e retira eus ar bed trubuilus,  
Evit beza en énvou da james evurus.

Er bla mil cant tri-uguent ha dre vloas c'hoas gante,  
Ebars en guir penitant e rentas e ene,  
Goude beza recevet e oll sacramanchou,  
Exortet e vignonet, ha grêt e adieuou.

E gorf a voe enterret gant calz a velodi  
Bras en berret Sant Andrean, er guær eus a Vadri.  
Nombr bras a belerinet a deu ato bemde  
Da implori e sicour, da visita e ve.

Eun daou-uguent vloas goude en em aparissas  
Da un Itron vertuzus, ha dezi e laras :  
Procurit d'am c'horf, Itron, ur plaç enoraploc'h,  
Ha dirac ar Vajeste m'em bo sonch ac'hanoc'h.

An Autrou a Toledé gant nombr a véleyen,  
Var ar plaç, a zisqennas ar stol en e guerc'hen :  
Pa voe fouillet an andret ma voe bet enterret,  
E gorf hep corruption en antier voe cavet.

Qement fleuren en antier a gresq er jardinou,  
Pa deu an nevez-amzer gant o oll parfumou,  
Ne roont qet assambles ur c'hoes qen excelant  
Evel a rentas neuze ar c'horf demeus hon Zant.

Gant calz a zevotion ha calz a vodesti,  
Voe bed a nos transportet da Ilis vras Madri,  
Bars en Chapel an Escop, en Ilis Cathedral,  
Elec'h ma touguer dezàn un enor special.

Ebars en dranslation eus e gorf precius,  
Voe grêt un nombr infinit a fejou merveillus,  
An oll gleyer o-unan da son a gommanças,  
Da galz a dud afflijet ar yec'het a roas.

Dre gontinuation e rê bemde c'houlou  
En andret e vignonet nombr bras a vuzudou;  
D'ar mud, d'an dal, d'ar bouzar ha d'ar paour impotant,  
Ouz e bedi gant fizianç, e roe soulajamant.

An drouc-speret a glasqas un nos precipita  
En finfond an abimou un den devot deza,  
Abalamour ma veve bars en pec'het mervel,  
Ha ma voa dre conseqant d'e Zoue infidel.

Ar Zant o aparissa a deu da chasseal  
An diaoul trist ha confus d'e brisoniou teval,  
Ha gant ur voes a zouçter a bedas e vignon  
Da ober incessamant ur guir gôvession.

Ur fumelen afflijet seiz vloas gant ar c'hlénvet,  
Isabel voa he hano, ha Tellez lezhanvet,  
O visita'r sepultur eus ar Zant gloriou,  
A recevas ar yec'het a drugare Jesus.

Sant Isidor o tonet den em aparissa  
D'un esclao eus an Turqi en errol o veva,  
En inspiras da renonç a grenn d'e falz lezen,  
Ma teuas da ambrassi hini ar Gristenien.

Pêvar den clàn afflijet gant clénvet corporel,  
Rentet en extremite en danger da vervel,  
O touch hepquen al lien en devoa lienet  
An Autrou Sant Isidor, o devoà ar yec'het.



Cessomp bremàn , va fluen , ha lezomp a gôsto  
Ar rest eus e viraclou , rac calz zo aneze :  
Ma ve ret deomp en antier donet d'o recita  
Na vemp qet prest er vech-mâ da zont da finissa.

Nê qet eta hep rêson , nac hep bout meritel  
E teuas ar pab Gregor , a hano pemzecvet ,  
Da laqat var cathalog ar zent all gloriôs ,  
An Autrou Sant Isidor , favori da Jesus.

Cetu echu an histor gaer demeus e vue ;  
Imitomp oll anezi gant fe ha carante :  
Mar heuillomp e exemplou hac e vertuziou rar ,  
E vezimp oll evurus un de hep laqat mar.

Tosta amàn , den impi , ha yen eus a galon ,  
Deus da scol Sant Isidor , disq ober orêson ;  
Gra dre imitation bep nos ha bep mintin ,  
Da exerciç a Gristen humblamant d'an daoulin.

Tad superb ha colerus , touerien da Zoue ,  
Heuillit douçder Isidor hac e humilite ;  
Pe seurt profit hoc'h eus-u diouz ho plasmou ,  
Nac oc'h enoriou monden , nac oc'h oll bombançou.

Un habitud criminel a so ebars er vro ,  
Da brofani alies ar Suliou , ar Gouëliou :  
Isidor o implije da servicha Doue ,  
Oc'h exerci an euvrou demeus a biete.

C'houi , bugale dinatur en andret Mam ha Tad  
Perac oc'h-u qen cruel , qen cri , ha qen ingrat  
Isidor a voa docil bars en qever e re ,  
Ouz o zrêti gant enor , respet ha carante.

Peguenlies e pec'her siouas dre injustiç,  
Dre anui, dre gourmandis, ha dre an avariç?  
Isidor a bratiqe ar vertuziou control,  
Hac a rê d'ar viçou-mâ bep moment ar brezel.

Eur re benac a laro : va foan so re galet  
Evit gallout observi ar yuniou comandet;  
Isidor a observe gant ur galon joaüs,  
Nonobstant e fatigou ha labouriou grevus.

Yaouanqis, bezit modest ebars en ho tillat,  
Me ho conjur da veva bepret herve ho stat,  
Isidor a voa contant eus e gondition,  
Ar gloar voe poeson dezàn, ar bed-mâ ur prison.

Ma carfe al Labourer bemde var e labour  
Qemeret Sant Isidor evit e vezilour,  
E velfemp ar vedisanç, ar c'homzou goloet,  
Souden en guir charite ha purete chenchet.

Mes na veler, er c'hontrel, nemet ambition,  
Finesse, ha trompleres, ha pep seurt trahison :  
Ar bed-mâ ê hon idol, ar c'hig, an ærouant,  
Ha na sonch qasi nicun ebars er jujament.

En àn, pa zàn da bourmen var bord ar meneziou,  
Ne glévàn nemet disput, dre oll bars er parcou,  
Medisanç, tamaleres hac injurius piqant,  
Blasfêmou, leoudouet, chansoniou insolant.

Cetu aze ar motif, ar sujet, ar rêson,  
A denn coler ha venjanç Doue, Roue an Tròn,  
Hac a rent infructuus ha vên an oll boaniou  
A souffr al Labourerien bemde er c'hampagnou.

En eur dremen, selaouit eur guelennadures,  
Mar doujit ho coustianç hac ho silvidigues,  
Dilezit ho coal vue, ha pratiqit ar mat;  
Allas! goude ar maro e vezot divezat.

Na gollit qet a gourach, resistit constant  
Ouz an tentationou demeus an ærouant,  
Suppliit Sant Isidor da zont d'ho proteji,  
Hac e vezo hep doutanç d'c'h oll guir minic'hi.

En paros Pleudaniel, escopti a Dreguer  
Bars en douar an Autrou ar Marqis Pelletier,  
En ur Chapel dediet da Santes Helena,  
Ema portret Isidor; deut oll d'e visita.

Bep lun Fasq ar Pantecost, dre gonje hon Prelat,  
E r'er eno ar memoar a Isidor hon tad;  
Na douetan qet na deuy ar pobl en afluanç  
En deiz-se d'e saludi gant pep sort reveranç.

Un nombr bras a viraclou a ra Doue dreizàn  
D'ar re a deu d'ar Chapel evit e visitàn;  
Rei a ra pep plijadur ha consolation  
Da guement den en antier en ped a vir galon.

Un den ar principala cus a Pleudaniel,  
Tremen a ràn d'ar silanç hep donet d'e henvel,  
En devoe un accidant a greiz e joaüsdet,  
Al lun Fasq ar Pantecost, ur bla so tremenet.

Var dro nao heur-anter voe hep comz na qerzet  
Ar bed oll en condaone hac ar vedecinet,  
Pa voe goestlet d'ar Chapel, e commanças parlaut,  
Ma recevas ar yec'het dre veritou ar Zant.

Ur buguel bian hanvet Mazeau an Hagarat;  
Mab Ezuant, ha Fant Callec, eus a Enes-Briat,  
En em vezas dre valeur en ur varazad dour,  
En gouelen diveza, hep gallout caout sicour.

Pa voe entre e divrec'h gant e vam astennet,  
Qement den e voa presant en crede decedet,  
Mes Doue hac Isidor o deus bet imploret,  
Hac o buguel en instant a so ressuscitet.

Dre un destin maleurus, Fant ar Borgn, a Dreguer,  
E deus laqet c'hoec'h buguel, allas! bars en lumier,  
Hep beza bet ar boneur da receo badiziant,  
Nonobstant e oll fatig, e foan hac e zourmant.

En em gavet é brazes na divar ar seizvet,  
D'an Autrou Sant Isidor é bet en em voestlet,  
Ha dre e brotection e qichen hor Jesus,  
E deus bet ur guilioud hac a so evurus.

Guillarm Janvier, habitant eus a Pleuveur-Gotter,  
Var ar guele afflijet gant clérvet ha mizer,  
O veza en angoni, gant an oll condaonet,  
Pa voe goestlet d'ar Chapel en devoe ar yec'het.

Eur buguel a Peuverit, impotent er c'herset,  
O visita Isidor a so bet goellaet;  
Diaguent ne remue nemet var e flac'hou,  
Neuze e yas e-unan hac o lezas eno.

Eur buguel a Pleuvian, o chom bars en arvor,  
Goelc'het gant dour vertuzus feunteun Sant Isidor,  
Eléc'h ma voa diaguent notet ha daoubleguet,  
En deus, dre c'hraç un Doue, recevet ar yec'het.

Un nombr bras a viraclou en deus c'hoas operet  
Aboe ma zé er c'hanton gant ar bopl invoqet;  
Ma ve ret o ranconti oll en particulier,  
E teufet da ramplissa nombr bras eus a baper.

Poent bras é demp finissa hep avanç davantach  
Arretomp amâ bremân, concluomp hon ouvrach  
Mar leqeomp en pratiq ar pez on eus scrivet,  
E vezimp er Barados un deiz oll curunet.

Supliomp a vir galon hon Tad Sant Isidor,  
Da veza hon Avocad hac hor guir Protector,  
D'hon presanti da Zoue en artiel ar maro,  
Ha da c'honit ar victor var an oll diaoulou.

Dirijomp oll hon moeziou d'en pedi assâmbles  
Da apesi un Doue irritet qellies,  
Da zivoal hon c'horf ato, da zivoal hon ene,  
Ha da veva direproch ar rest eus hor bue.

Deut eta, oll Vretonet, deut oll a bep canton,  
Deut da Zantes Helena da bedi hor Patron;  
Rentit dezàn hoc'h homach, hoc'h henor, ho respét :  
Mar en petit gant fianç e vezot sicouret.

Sant Isidor so ive en Ilis Plouigno,  
Guir Batron ha guir Vignon Labourerien peb bro :  
Deut d'en pedi, Bretonet, eus a greis ho calon,  
Hac o pezo gant Doue e venediction.

FIN.

## GUERZ

VAR UR PLAC'H A VEPRISAS E ZAD HAC E MAM.

Var ton : *Guerz an Danserez.*

**C**LÉVIT, còs ha yaouanq, selaouit, Bretonet,  
Un exempl pitoyabl eus a ur Plac'h debordet,  
Pehini a veprise e Mam coulz hac e Zad,  
Doue e funissas en compagnenez vad.

E c'horf a voa galant, merc'h voa d'eul labourer,  
Ouspen ma voa glorijs, meurbet e voa fier,  
E zad eus e vicher a voa ur vigneron,  
A chome e qichen ar guær eus a Chalon.

Evel ma voa plac'h coant, balamour d'e guenet,  
Un den a galite en deus-hi eureujet,  
En devoa nombr a vadou hac eus a binvidiguez,  
Ma voa re absolu p'oe laqet da vestres.

Aben c'hoec'h vloas goude m'oar plac'h-mâ eureujet,  
E zad ive e mam a voa paour bras rentet;  
Hac int sônjal o daou dont d'en em resolvi  
Da vont da di o merc'h en esper chom gauti.

Pa errujont en e zi o deus-i goulennet,  
O sònjat gant joa vras e vijent recovet,  
O tislòrya penaus voaint e mam hac e zad  
Ma teu o merc'h debordet ractal d'o scandalat.

Ar paour qès a dad, o clasq en em sicour,  
A dennas prest e doq : bonjour, va merc'h, bonjour;  
E mam e zaillas pront evit e ambrassi,  
Mes boutet voe ganti ractal var leur an ti.

Sortiit, emezi, hac it prest alessé ;  
Me ne meus qet a dud hac a ve qer paour-ze ;  
Mez ameus ganéc'h-u, fê eo diu-me clêvet  
E vec'h diñ tad ha mam ; mes n'ho couzanvan qet.

Evel ma voa, nos-du e houlenjont loja,  
Balamour da Zoue, er c'hraou da viana :  
An ingrates neuze a ordrenas ober  
O c'has eus e bisach pront da di e fermier.

Rei a ras en e zi fest ha bal an nosves,  
En amzer ma edo e zad e mam ivez  
Er c'hraou var ar c'holo gant naon en o c'halon ;  
Goude rei o danves d'e laqat da ltron.

Mes Doue ne fell qet dezàn e ve netra cuzet,  
A bermet en nôsves-màn ma vije punisset :  
Qeit ha m'oa o tansal memes e creiz an danç,  
Gant e c'hompagnunez, e varv en o fresanç.

Cetu aze ar fin eus ar plac'h ingrates,  
Goude meprizout e zud. M'ho ped, laqit eves :  
Calz a ra evel houmàn, rac beza zeus merc'h-hes  
N'ho deus evit o zud nac enor na respet.

M'ho ped, abeurs Doue, oll bugale yaouanq;  
D'ho tadou, d'ho mamou bezit oboissant;  
Douguit enor dezo ha deut d'ho respecti,  
Jesus ne vanqo qet dont d'ho recompansi.

— FIN —



---

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉVAN.